


GWERZ ZANTEZ TRIPHINA

HA

ZANT TREMEUR HE MAB



I.

1. Tosteit, tud vad a Vreiz-Izel,
Da glevet eur vuez zantel :
Buez Triphina, groeg nerzuz,
Ha Tremeur, bugel vertuzuz.
2. Triphina mamm, Tremeur bugel,
Ho daou ganet e Breiz-Izel,
A zesko d'ac'h, dre ho bue,
Karet ho pro hag ho Toue.

3. Gwerok a oe tad Triphina,
Eunn otrou deuz ar brudeta,
Eur prins a c'halloud hag a fe ;
Bro Gwenet out-han a zente.
4. E kastel Gwerok, dizoursi,
Ar verc'h a deue da greski
Enn gened, enn deskadurez,
Enn doujans Doue, enn furnez.
5. Med etal Gwerok e veve
Ar c'hont Komor, den didrue,
Komor, spont euz oll dud ar vro,
Den a dorfet, den a varo.
6. Heman lerc'h ha lerc'h a laze,
Zul gwech, he briejou neve,
Rak meurbet braz oa he greden
Enn falz lavar he zorserien :
7. « Komor, eme-z-he, diwalet,
Gand eur mab d'hoc'h c'houi vo tiet :
Na dimezet bikenn ho merc'h,
Pe ho pezo keun braz warlerc'h. »
8. Koulskoude 'n'eur welet, eunn de,
Triphina iaouank, war vale,
Komor en deuz bet diskleried
E vo Triphina he bried.

9. Gwerok, d'eunn hevelep goulen
En deuz spont euzuz hag anken :
« Penoz rei ma merc'h, eme-z-han,
D'ar fallan den euz ar vro-man ! »
10. Komor, euz he du, a c'halvaz
Mignon ar c'hont koz, zant Weltaz :
Gand he zikour e krede mad
Dont a-benn da c'honid ann tad.
11. Gweltaz, aoun na zavje brezel
Tre daou brins a renk ken huel,
Evit zuroc'h ho unani,
A lakaz Gwerok d'assanti.
12. Kenkent e oe gret ann eured,
Ha Komor, leun a joaüsted,
A gas gant-han he wreg Zantel
Pell euz ar ger, enn he gastel.
13. O Triphina, pebez glac'har !
Goude neubet, ann den digar,
Elec'h he garante gentan,
A zell adreuz ouzoc'h breman !
14. Prest oc'h da gavet eur c'hrouadur ;
'N'eur zonzal hoc'h euz plijadur ;
'N'eur zonzal Komor ankeniet
A lemm he gleze milliget.

15. Pelleit, merc'hik paour, hag hastet,
Bete ti ho tad, mar gallet,
Komor a glask enn he galon
Ann tu da lazan ann itron.

II.

1. « O ma Doue mad, eme-z-hi,
Pebez den fall, pebez den kri !
Petra, Komor, am euz-me gret ?
Ziouaz, re am euz ho karet !
2. Ma matez vad, Ivona ger,
Hastomp, na gollomp ket amzer ;
Digaset d'in ma c'hazek wenn
Warc'hoaz, kent ann de, er zaonenn.
3. Dal m'e deuz roet hec'h eurjou,
Daoulinet, hag o skuill daerou,
E ra he feden da Jezuz ;
He c'hlevet e oa truezuz :
4. « O ma Doue, o ma Zalver,
Pebez rustoni em c'henver !
Ni groage paour, zo peurvuian
Zammet a drubuil er bed-man.

5. Me na gredfenn ket koulskoude
En em glemm ouzoc'h, ma Doue !
Rak, me hen goar, c'houi ra pep tra
Evit eürustet Triphina.
6. Eur c'hras hepken a c'houlennan :
Gret d'am fried, eunn de, goelan
War he dorfejou spouronuz,
Ho gwalc'hi 'n'ho koad, o Jezuz !
7. Neuze, didrouz, e deuz zavet....
Komor, n'he wele oa kousket :
Hag er mez, war lein he c'hazek,
E kerz da Wened, 'n'eur redek.
8. Komor, d'ar beure, 'n'eur zavel,
Gant kounar, hag a vouez huel,
En deuz goulennet, dreist pep tra,
Pelec'h, pelec'h eo Triphina ?...
9. Raktal, he galon fuloret,
War gein he varc'h en deuz zaillet....
Triphina, n'helli mui tec'hel,
Triphina, red e vo mervel.
10. Netra na drec'h war ann den kri,
Nag he daouarn kroazet gant hi,
Nag he fedennou ken klem:nuz,
Nag he zellou ken glac'haruz.

11. Evel eur bleiz gand eunn danvad,
E tifreuz he bleo, he dillad :
Ha dre eunn tol euz he gleze
E lemm digant-hi he bue.

12. Triphina, beuet eun he goad,
Zo dilezet e kreiz ar c'hoad :
He fenn zo deuz-hi distaget.....
Eled ann env, deut d'he miret !

III.

1. Warlerc'h he dorfet, ann den fall
A red buan, enn eur iudal,
Da Gastel-Finans, he balez,
Zavet huel uz d'ar Blavez.

2. Ar vevelien a lavare,
O welet ru-goad he gleze :
Hon mestrez ker a zo maro !....
Da virviken ni he goelo.

3. Da virviken ni he goelo ;
Pebez koll 'vidomp hag ar vro !
Kasomp unan benag timad
Da dougen ar c'helou d'he zad.

4. Ann tad, 'n'eur glevet he maro,
A skuill daerou stank ha c'houero.
» Triphina, ma merc'h Triphina,
» Hep hoc'h penôz galloud beva ? »
5. Hag ar c'horf gant Gwerok neuze
A oe klasket e touez ar gue ;
Douget d'ar ger gand enor braz,
Da c'hortoz he vignon Gweltaz.
6. Raktal e red d'ann abati,
E koms d'ar Zant, 'n'eur hirvoudi :
« D'ar bourrev hoc'h euz-he roet,
Ar bourrev 'n'euz hi dibennet !... »
7. « Gwerok, Gwerok, ma mignon mad,
Laket termen d'ho kalonad....
Doue a deñ da dennan gloar
Euz ar meuntr a ra ho klac'har. »
8. Ar Zant na goll ket ann amzer,
Mont a ra beteg ar meuntrer :
Mez klozet eo d'ezhan ann or
Dre c'hourc'hemen ar c'hont Komor.
9. Ha Gweltaz, p'en deuz bet gwelet
E talc'he Komor 'n'he bec'het,
A ia tro-war-dro d'ar c'hastel,
A c'halv Komor a vouez huel.

10. Evel na ve gret van ebet,
Ar Zant prestik n'euz daoulinet ;
Ha 'n'eur doll eunn dornad douar,
Gweltaz d'ar pec'her a lavar :
11. « Maloz da neb a nac'h he c'hir !
Maloz d'ar galon houarn ha dir !
Maloz da veuntrer Triphina,
Ha d'he gastel krenv, ha d'ezha !
12. A boan ar Zant en deuz komzet,
Raktal ar c'hastel n'euz straket ;
Komor, blonset gand ann tôliou,
A dec'h pell, dreist ar meneiou.

IV.

1. Goude ar burzud-man, Gweltaz
Da Gastel Gwerok a redaz ;
Da gambr Triphina dibennet,
War eur gwele kaer astennet....
2. Daoulinet e lar he beden ;
Ar boapl a bed enn he gichen :
Neuze lak ar penn war ar skoa,
Ha krenv e koms euz Triphina :

3. « Ma merc'hik ker, o ma bugel,
Enn hano ann Drindet zantel,
Tad, Mad, Speret glan, eunn Doue,
Zavet, ha bevet adarre !.... »
4. Setu ar c'horf ien o finval,
Leun a vuez, evel gwechall :
Ann daoulagad zo digoret ;
Eur vouez sklintin a zo klevet :
5. « O ma Doue, pegen eüruz,
En em gavenn gant ma Jezuz !
Mez d'ho mouez, ma zad biniget,
Ma ine d'am c'horf n'euz nijet.
6. 'Benn eunn neubet amzer goude,
Eo galvet Gweltaz a neve,
Da skuillan dour ar vadiant
War dal eur bugel dous ka koant.
7. « Tremeur, eme-z-han, vo hanvet,
Hag em c'houant e vo zavet :
Eunn el eo, eunn el e chomo ;
Eüruz he vamm, eüruz he vro ! »
8. Ar bugel a dremen pemp bloa
E kichen he vamm Triphina :
Neuze da heuill war ar studi
E oe kaset d'ann abati.

9. Enn eur gouant leanezet
Ar vamm e deuz en em dennet,
Enn eur c'horn kuz tost d'ar Blavez,
Tost d'ar Sulon, kreiz ar barrez.

V.

1. Triphina, merzerez gwirion,
C'houi ho pezo c'hoaz poan galon :
Rak Komor, ann den kounaret,
A glask ho pugel biniget.
2. Kavet a ra 'n eul lec'h distro
Ar bugel a glaske pell zo ;
Ha gand eunn tól ann tad digar
A strink he benn war ann douar.
3. Mèz, o burzud a beurz Doue,
Tremeur dibennet a gerze ;
Tre he zaouarn e toug he benn
Beteg he vamm leun a anken.
4. A boan ar Zant a zo digouet
Enn kichen he vamm estlammet,
E kouez maro war ann douar,
Hag he ine a ninj d'ar gloar.

5. Triphina, gand eur glac'har braz,
War gorf he mab a lavaraz :
« Enor, ma Doue, d'ar merzer,
Ha pardon, m'ho ped, d'ar meuntrer ! »

6. Eunn neubet goude, Triphina
A varv enn peoc'h gant kalz a joa :
Laket int ho daou enn eur be,
Ann eil e kichen egile.

VI.

1. Breiziz, ma breuder, pa gerzet
War hent zantez Anna-Wenet,
'N'eur vont hed-da-hed d'ar Blavez,
C'houi gavo roudou ar Zantez.

2. E Zant-Inan c'houi c'hell gwelet
Eur mene euz a goat karget :
Ouz he droad e tarz eur feunten,
Eno Triphina re peden.

3. E Laniskat e weler c'hoaz
Chapel ha feunten zant Weltaz ;
Eno Triphina c'houlenne
Digand ar Zant nerz d'he ine....

4. Parrez Zin-Triphin a bell-zo
E deuz he be hag hec'h hano :
Eno dirag hon tadou koz
E re pinijen de ha noz.
5. Eno, tal iliz ar vamm ger,
Ema chapelik ar merzer :
Koant evel Tremeur he-unan,
Pa bede Doue er bed-man.
6. Gand ann eskob eo biniget,
Gand kalz a dud darampredet :
Da viz ar bleuniou, da viz Me,
Ema pardon ar vugale.
7. Gant fe ni ho salud eta,
Be Tremeur, iliz Triphina :
Douar zantel, douar zakret,
War-n-hoc'h hon Zent a neuz kerzet !
8. Aman, liez ni daoulino,
Hon bugale ni digaso :
Dousoc'h e kavimp hon poaniou,
Eünoc'h e pignimp d'ann envou.

Amen.

KANTIK

DA ZANTEZ TRIPHINA HA DA ZANT TREMEUR



1. Kanomp oll a greiz hon c'halon,
Gloar da Driphina hon Itron !
Kanomp, kristenien a bep oad,
Gloar da Dremeur, he bugel mad !
2. Kanomp oll, beteg ar maro,
Enor da Vreiz-Izel hon bro !
Nag a Zant e deuz-hi maget,
Nag a Vreton enn env zavet !
3. Enn env e klevomp Triphina
Hag he mab Tremeur o kana :
War hon douar ho deuz bevet,
Hag ho c'hurunen goneet.

4. Aman, Breiziz, hon daoulagad,
Pebez tensor, pebez eurvad !
Goude kement a vloavejou,
A hell gwelet ho relegou.
5. Herve lavar hon tadou koz,
De c'houel Triphina, n'he faroz,
Ar bleun, er prad hag er c'hoajou,
A zav lintrusoc'h ho fennou.
6. Skleroc'h Blavez gand he dour braz
A ruill etrezeg ar mor glaz ;
Dousoc'h mouez ann evn war ar bar
A gan d'ann heol beure pa bar.
7. Ha ni a bep tu dastumet,
Dirag ho relegou stouet,
Zent hon bro, ni ra hon feden ;
Ezomm hon euz euz ho souten.
8. Triphina, pa oac'h er ger c'hoaz
Gant ho kerent, plac'hik dinoaz,
N'ho poa ken c'hoant nemert zenti
Ouz mouez Doue hag ho hini.
9. Daoust d'ar skoueriou fall a weler,
Daoust d'ann drouk-speret, mamm dener,
D'ar verc'h iaouank reit nerz bepret
Da heuill ann hent hoc'h euz heuillet.

10. Bevet hoch euz gand eur pried
Dizeblant ha kri 'n hoc'h andred ;
Deut da zikour ar priejou
D'en em harpan n'ho zrubuillou.
11. Ha c'houi, Tremeur, bugel zantel,
Miret ar bugel 'n he gavel :
O tont euz ar fons vadiant,
Ema 'vel-d-hoc'h eunn elik koant !
12. Laket da grenvat he daou-droad,
He speret da grompren ar mad :
Méz, evel-d-hoc'h, 'rog he gozni
Ra varvo kent evit pec'hi !
13. He vamm a c'houlén, dre ho mamm,
Ma chomo he ene dinamm ;
Ma chomo kristen ha breton,
Den a fe ha den a galon.
14. O Zent euruz, hon fatronet,
Truez ouz ann emzivadet,
Ouz ann intanvez enn daerou,
Ouz ar c'hlanvour enn he boaniou.
15. Dreist peb tra harzet na gouezo
Kroaz hag oter Jezuz 'n hon bro :
Ra vezo hon buez zantel,
War douar zantel Breiz-Izel !

16. Pa zono ann heur da guitad,
Deut da zerri hon daoulagat :
Ni fell d'imp gan-hoc'h, enn envou,
Nijal da veuli hon Otrou.

Evel-se bezet gret.

Permeti a reomp ma vezo moulet ar c'hantik-
man enn enor da zantez Triphina ha da zant
Tremeur, a rei a reomp eunn induljans a 40 dé
da gement-hini hen kâno gand ann devotion dleet.

S. Briek, ar 5 a viz mae 1881.



AUGUSTIN,

Eskop S. Briek ha Landreger.